

Ar vorlaerien zo !



Bannielig du ha penn marv

Ar vorlaerien zo !

Ar vorlaerien zo !

Bannielig du ha penn marv

Ar vorlaerien zo

o tont e-barzh ar porzh !

Setu tud kriz ha drouk, tudoù,
Gwad 'leizh dindan o ivinoù
Ha se zo gwad bugaligoù
Taolioù a blij dezhe hag emgann
Pa vez kann ne vez ket un tamm
Komz da eil met lazhañ unan !

Diskan

Ar paotr Chiko zo en o fenn
Kleizhennoù, troc'hoù penn-da-
benn
War e lagad zo ur vandenn
Rom 'evont 'n ur varrikennad
Er mor pa gouezh ur prizoniad
War vourzh e huchont holl :
« Graet mat !!! »

Diskan

Mammig, 'meus ket aon

Daouzek vloaz on-me a-boan

Ur bugelig n'on ket ken

D'ar mor don mont a fell din

Dioute 'meus ket aon

Da lec'h all e fell din mont

Gwelet liv ar mor zo du-hont

Gant ar vorlaerien.

Bannielig du ha penn marv

Ar vorlaerien zo !

Ar vorlaerien zo !

Bannielig du ha penn marv

Ar vorlaerien zo

o kuitaat ar porzh !

E vamm n'he deus ket eñ gwelet
Nemet keleier ur poltred
En devezh-se ma oa bet krouget
E vamm n'he deus ket eñ gwelet
Nemet keleier ur poltred
En devezh-se ma oa bet krouget

Diskan

Diwar « Voilà les pirates »
gant Gérard Guillou-Delahaye.
Bet troet e brezhoneg
gant Kristof Markier.